

*YF\_0089\_Ar sorserez*

Une sorcière qui confesse ses crimes, un jeune écolier qui l'initie: La Villemarqué a cru reconnaître dans ces deux personnages Héloïse et Abélard. Abondamment recueillie au siècle dernier à travers toute la Basse-Bretagne, cette gwerz étonnante est toujours très en faveur.

Laret din-me 'ta plac'hig plac'hig a driwec'h ble,  
Gand piv az-peus he desket da sorserez kente  
-Digand ur skoler yaouank peuz tost da di ma zad,  
En-eus desket din an droug e-lec'h deskin ar vad.

En-eus desket din an droug e-lec'h deskin ar vad.  
Hag a gase ac'hanon bemnoz da silaou ar zabat.  
- Larit din-me 'ta plac'hig plac'hig a driveh ble,  
Gant petra az-peus 'ta graet da sorserez kente.

- Gant lagad kleiz ur malbran ha kalon un touseg,  
An had dimeuz ar raden da ouel Yann dastumet  
An had dimeuz ar raden da ouel Yann dastumet deuz an  
noz,  
O ma jerr ma despunet o vorz e deus en noz.

Me am-eus ur houfig balon er ger e ti ma zad,  
Hag an neb he digoro hennez en-do kalonad,  
Hag an neb he digoro hennez en-do kalonad,  
Eno a zo laboused hag a zo maget mad.

Eno a zo laboused hag a zo maget mad.  
Ne n'eo ket gand kig gonifl kennebeud gand kig gad.  
Ne n'eo ket gand kig gonifl kennebeud gand kig gad.  
Gand gwad an inosented a-raog ma vefent badeat.

Pi ve ar bugel er porched a heon gwisket in gwenn  
Me ouie mont dim leret deuz dindan ar vantel.  
Mi ie harz deus or beleg de lared e avern bred,  
De gonsakri en osti mar e din permetet.

Me meus or parkad zegal ar ger e ti ma zad  
Ag e oa et din hado on driweh gwestellad.  
Ag e oa et din hado on driweh gwestellad  
O benn pe oa destumet oa ket or skuidellad.

A benn pe oa destumet oa ket or skuidellad  
A benn o pe oa gwentet oa ket o reunenn vad.  
Me am-eus eur bernig keuneud er ger e penn ma zi  
Lakan ma houfig balon en e reiz da liskin.

Ene a zo seiz viper o hori ur serpan.  
Evid liskin er bed-man perpetuelaman.  
C'hoaz mar mije bet bevet c'hoaz ur bloavez pe daou  
Me am-boa laket Breiz Izel da drein war e genou.

Me am-boa laket ken tano kec'h segal gwiniz du  
Evel an aour melen e-barz kornig ar ludu.  
-O nag arze 'ta plac'hig na trawalc'h az-peuz graet  
Seiz leo ahan dioudes na ziwann greunenn ed.

- Dites-moi, jeune fille, fille de dix-huit ans,  
Qui vous a enseigné votre premier maléfice ?  
- C'est un jeune écolier, tout près de chez mon père...  
Qui m'a appris le mal au lieu de m'apprendre le bien

Qui m'a appris le mal au lieu de m'apprendre le bien  
Il m'emmenait tous les soirs écouter le sabbat  
- Dites-moi, jeune fille, jeune fille de dix-huit ans,  
Avec quoi avez-vous fait votre premier maléfice ?

-Avec l'oeil gauche d'un corbeau et le coeur d'un crapaud  
Et de la graine de fougère recueillie à la Saint-Jean.  
Et de la graine de fougère recueillie à la Saint-Jean le soir

J'ai chez mon père un coffret-bahut  
Celui qui l'ouvrira en aura crève-coeur...

Il y a là des oiseaux bien nourris

Il y a là des oiseaux bien nourris  
Non ce n'est pas avec de la viande de lièvre ni de lapin

Avec du sang d'innocents avant qu'ils soient baptisés.

Moi aussi j'empêche notre curé de dire sa grand-messe  
de consacrer l'hostie

J'ai un champ de seigle chez moi chez mon père

J'ai un tas de bûches au bout de ma maison  
J'y mettrai mon coffret-bahut pour le faire brûler

Il y a là sept vipères qui couvent un serpent  
Pour incendier ce monde jusqu'à la fin des temps  
Si j'avais encore vécu une année ou deux  
J'aurais fait retourner la Basse-Bretagne.

J'aurais rendu l'avoine, le seigle et le froment aussi rares  
Que l'or jaune dans le trou du foyer.  
- O arrêtez jeune fille vous avez fait assez  
A sept lieues à la ronde, plus un grain de blé ne pousse !